

Fiñv da Skolaj

Skolaj Diwan Jakez Riou / n° 2 / Ebril 2017

KELEIER AR C'HUZUL-MERAÑ LES NEWS DU KUZUL-MERAÑ

DIOUER A BLAS EN HUNVA Re strizh eo deuet da vezañ an hunva ha ret eo deomp klask diskoulmoù evit gallout degemer ar muiañ posupl a dud. Mankout a raio plasoù adalek miz Gwengolo (dreist-holl e tu ar merc'hed). Kaset e vo ur c'houlennaoueg d'ar familhoù evit resisaat ezhommoù pep familh hag evit renabliñ an diskoulmoù posupl (kenweturiñ, kavout bod ha boued e familhoù degemer...). Dezverkoù resis a vo embannet gant ar c'huzul-merañ e ken kaz ma vankfe plas en distro skol.

MANQUE DE PLACE À L'INTERNAT L'étroitesse de l'internat oblige à rechercher des alternatives et des solutions complémentaires pour l'hébergement des élèves. Il manquera dès septembre des places à l'internat (surtout chez les filles). Le kuzul-merañ transmettra aux parents un questionnaire permettant de préciser les besoins de chaque famille et de lister les solutions (covoiturage, hébergement en famille deux nuits par semaine...). Des critères seront établis par le kuzul-merañ en cas de trop grand nombre d'élèves à la rentrée.

BALIBOM Marteze eo deuet ho pугale da c'houlenn selaouerien diganeoc'h ? Evit gellat implijout ur benveg nevez-flamm bet prenet gant ar skolaj eo : ar balibom. Petra eo ar machin-se ? Ur valizenn skignañ eo, talvoudus evit pleustriñ war ar yezhoù. Un urzhiataer hezoug a gas hag a zastum dafar pedagogel prientet ha meret gant ar gelennerien war tablettenoù implijet gant ar skoldi.



BALIBOM Vos enfants vous ont peut-être demandé des écouteurs pour tablette ? Cela s'explique par l'outil dont s'est doté le collège : le balibom. Il s'agit d'une valise de baladodiffusion adaptée particulièrement à l'apprentissage des langues. Un ordinateur portable est relié sur un ensemble de tablettes dédiées à la distribution/collecte de contenu pédagogique préparé et administré par les professeurs.

Kiriek eus an embannadur / Responsable de publication : Erwan ar Berr & Nicolas Bihan.

Skridaozañ / Rédaction : Lenaig Abiven, Katell Chantreau, Julie Coatmellec, Mick Loeffel.

Pajennaouiñ / Maquette : Fabrice Véronneau.

20 VLOAZ AR SKOLAJ D'ar Sadorn 17 a viz Even e vo lidet deiz-ha-bloaz ar skolaj. Kalzig a draou zo raktreset dija. C'hoariadegou-sport ha c'hoariou Breizh a vo aozet er skolaj da c'houde merenn. E MPT Penharz e kendalc'ho ar gouel e fin an abar-daez : bez e vo da zebriñ, da evañ, da selaou ha da zañsal ! Er maez war ar blasenn : digor-kalon gant ar fañfar A bout de souffle, kanaouennoù gant ar skolajidi, bagad Diwan, flashmob ha diwezhatoc'h er sal : Nolwenn Korbel, Marine/Sterenn/Enora ha Maelan hag e gomper. Ur genskrivadeg barzhonegoù hag ur genskrivadeg skritelloù war an tem « Votit Jakez Riou » a vo aozet ouzhpenn gant ar skolaj. Deuit niverus rak plijadur vo sur !

PAKADOÙ BLOAVEZH MAT E miz Genver, evit ar wech kentañ, ez eus bet kaset un oberenn « pakadoù bloavezh mat » gant ar c'huzul-skoazell. Diwar goulenn ar SCOP Informatique libre staliet e Kemper, en deus aozet ha kaset 40 pakad bennak da bratikoù ar SCOP, enno kouignoù lipous, ur gartenn bloavezh mat hag ul lizher personel. Gounid evit ar skoazell : 550 €. Emañ ar c'huzul-skoazell o klask diorren oberennoù seurt-se. Ma anavezit embregerezhioù hag a c'hellfe bezañ dedennet gant ar servij-se, kit e darempred gant Aurélie Savina : asavina@hotmail.fr. An embregerezh a ro deomp al lizheroù ha roll kontaktoù ar pratikoù, ar c'huzul-skoazell a ra war-dro ar peurrest.

20 ANS DU COLLÈGE Le samedi 17 juin, le collège fêtera ses 20 ans. Le déroulé de cette journée se précise : l'après-midi, au collège, tournois sportifs et jeux bretons. En fin de journée, la fête se poursuivra à la MPT de Penharz : il y aura à boire, à manger, à écouter et à danser. Dehors sur la place : apéro-fan-fare avec A bout de souffle, chants des collégiens, bagad Diwan, flashmob et plus tard dans la salle : Nolwenn Korbel, Marine/Sterenn/Enora et Maelan et son compère. Dans le cadre de cet anniversaire, le collège organisera deux concours : un concours de poésie et un concours d'affiches sur le thème « Voté Jakez Riou ». Pour que cette fête soit une réussite, nous espérons vous voir nombreux.

COLIS DE BONNE ANNÉE Au mois de janvier, pour la première fois, le kuzul-skoazell a mené une action « colis de bonne année ». Sollicité par la SCOP Informatique libre installée à Quimper, il a confectionné et envoyé une quarantaine de colis avec biscuits au beurre, carte Bloavezh mat et courrier personnalisé pour les clients de la SCOP. Bénéfice de l'opération : 550 €. Le kuzul-skoazell cherche à développer cette activité, si vous connaissez des entreprises qui pourraient être intéressées par ce genre de service en 2018, contactez Aurélie Savina : asavina@hotmail.fr. L'entreprise fournit les courriers personnalisés et le listing des clients, le kuzul-skoazell s'occupe de tout le reste.



SKOLAJ MOD IMPLIJ COLLÈGE MODE D'EMPLOI

KENDALC'H DIWAN Ur rouedad bras eo Diwan hiziv an deiz, ennañ 46 skol kentañ derez, 6 skolaj hag ul lise. Bep eil bloaz en em gav dileuridi pep skol, liseidi ezel eus ar gevredigezh, an implijidi, ar gelennerien hag ar brofourien da-geñver Kendalc'h Diwan. An emvod-meur bloaziek a vez aozet da-geñver ar c'hendalc'h (bilañs ar bloavezh, dilenn kuzul-merañ Diwan Breizh...) met n'eo ket tout : stalioù preder ha votadegoù a vez aozet ivez, o fal reiñ ul linenn stur politikel evit heñchañ labour ar c'huzul-merañ e-pad an daou vloaz goude. D'an 29-30 a viz Ebrel e vo Kendalc'h kentañ Diwan, e Plañvour. Pep skol a rank kas daou zen d'an nebeutañ.

CONGRÈS DIWAN Diwan est devenu un grand réseau rassemblant 46 écoles, 6 collèges et 1 lycée. Tous les deux ans, les représentants de chaque école, les représentants des lycéens, des salariés, des enseignants et des donateurs se retrouvent à l'occasion du Congrès Diwan. Au programme : l'assemblée générale annuelle de l'association (avec bilan moral et financier et élection du CA), ainsi que des ateliers de réflexion et des votes ayant pour but de donner les grandes orientations politiques qui guideront le travail du CA de Diwan les deux années suivantes. Le prochain Congrès Diwan aura lieu à Ploemeur les 29-30 avril. Le collège Jakez Riou y enverra deux représentants au moins.

BUHEZ AR SKOLAJ VIE DU COLLÈGE

ARNODENN KREIZ EIL DEREZ Ur seurt Breded diabarzh evit skolajidi Trede klas Diwan eo. Teir arnodenn dre gomz a zo (15 mn pep hini, war danvezioù dibabet gant pep skolajiad) hag un arnodenn dre skrid (2 eurvezh brezhoneg). Er Releg-Kerhuon 'h aio skolajidi Kemper da dremen an arnodennoù dre gomz er bloaz-mañ. An DIBAB zo un arnodenn all, aozet gant holl skolajoù Diwan, evit priziañ live brezhoneg holl dredeidi Diwan. Diwan a blijfe dezhañ e vefe DIBAB un arnodenn evit an holl dreidi vrezhonek (Diwan ha hentennoù divyezhek) met n'eo ket, evit poent.

L'AKED : LE BREVET DIWAN C'est l'examen de fin de collège, interne à Diwan. Il est composé de 3 épreuves orales (15 mn chacune, sur des matières choisies par chaque collégien) et une épreuve écrite (2h de breton). Cette année, les 3e du collège de Kemper iront au Relecq-Kerhuon passer les épreuves orales. Un autre examen, appelé DIBAB, est organisé courant mai pour évaluer le niveau de breton de tous les Troisièmes de Diwan. Diwan souhaiterait que cet examen soit commun à tous les Troisièmes des filières bretonnantes (Diwan et classes bilingues), mais il ne l'est pas pour l'instant.

DEIZIATAER AGENDA

08/04 Nozvezh Sinema chakod e Douarnenez
29-30/04 Kendalc'h Diwan e Plañvour
03/05 AKED dre gomz
11/05 AKED dre skrid
17/05 Sonadeg Krismen & Alem e Kemper
23/05 DIBAB
17/06 Fest 20 vloaz ar skolaj

8/4 Soirée Sinema chakod à Douarnenez
29-30/04 Congrès Diwan à Ploemeur
3/5 AKED oraux
11/5 AKED écrits
17/5 Concert Krismen & Alem à Quimper
23/5 DIBAB
17/6 Fête des 20 ans du collège

BEVAÑ E BREZHONEG VIVRE EN BRETON

KAMPOÙ VAKAÑSOÙ : DIGOR EO AN ENSKRIVADENNOÙ ! CAMPS DE VACANCES EN BRETON : INSCRIPTIONS OUVERTES !

Un 50 kamp brezhonek a vez aozet bep bloaz e Breizh a-bezh. 800 bugel a vez degemeret enno. 10 kamp zo kinniget d'ar grennarded e 2017. O fal : reiñ d'ar re yaouank da vevañ ur vuhez a-stroll pinvidik, krouiñ ha dibab asambles, reiñ ur plas da bep hini e-barzh ur strollad, krouiñ liammoù gant tud yaouank eus pep lec'h e Breizh, ha bevañ e brezhoneg e-maez eus ar skol. Roll ar c'hampoù : levrig roet d'ar skolajidi pe war Internet : <http://camps-breton-gallo.ubapar.bzh>




Chaque année, une cinquantaine de séjours de vacances en breton sont organisés dans toute la Bretagne et accueillent quelques 800 enfants et ados. En 2017, 10 séjours sont proposés aux ados. Leur but : donner aux jeunes l'occasion d'expérimenter une vie collective intense : créer et décider ensemble, aider chacun à trouver sa place dans le groupe, créer des liens avec d'autres jeunes originaires des quatre coins de Bretagne, et vivre en breton en dehors de l'école. Livret des séjours distribués aux collégiens en mars ou sur Internet : <http://camps-breton-gallo.ubapar.bzh>

BERR-HA-BERR BRÈVES

GWIR PE GAOU ? Lod a lâr ne vez ket aotreet ar re n'o deus ket paket an AKED da genderc'hel gant o studioù e lise Diwan. Deoc'h da c'hoût : n'eo ket gwir ! N'eo ket ret bezañ bet paket ar Brevet evit mont en eilvat klas kennebeut.

LÉGENDE URBAINE : Certains affirment que l'on ne peut poursuivre sa scolarité au lycée Diwan si l'on n'a pas eu le diplôme AKED (Brevet interne à Diwan). C'est faux, de la même façon que l'obtention du Brevet n'est pas une condition pour le passage en seconde.

Ur strollad skolajidi ha liseidi Diwan o deus labouret gant ar c'hevredigezhioù Daoulagad Breizh ha Emglev Bro Douarnenez evit aozañ an nozvezh « **SINEMA CHAKOD** » e-lec'h ma vo diskouezet filmoù berr e brezhoneg filmet gant kameraioù bihan. Pedet oc'h holl da gemer perzh en abadenn-se e MJC Douarnenez, d'ar Sadorn 8 a viz Ebrel.



Un groupe de collégiens et de lycéens Diwan ont planché avec les associations Daoulagad Breizh et Emglev Bro Douarnenez pour organiser la soirée de présentation des films « **SINEMA CHAKOD** » (des courts métrages en breton réalisés avec des caméras de poche, téléphones...). Vous êtes tous invités à cette soirée le samedi 8 avril à la MJC de Douarnenez.

DIARBENNIÑ AR RISKLOÙ Chantal Rien, arbennik war an diarbenniñ e-keñver yec'hed, zo deuet d'ar skolaj d'an 9 a viz Meurzh evit kinnig d'ar skolidi 4^{re} ha 3^{de} tabutal war an drammoù, ar sujidigezh, ar sekselezh... Bep bloaz e vez kinniget ur prantad kizidikaat seurt-se d'ar re 4^{re} ha 3^{de}.

PRÉVENTION DES CONDUITES ADDICTIVES Le 9 mars, Chantal Rien, consultante en prévention santé, est intervenue au collège à l'issue des cours, auprès des 4^e et des 3^e. Sous forme de débat, elle a abordé les conduites addictives liées à l'adolescence et les comportements à risque. Ce type d'intervention est proposé chaque année aux élèves de 4-3^e.